

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

## 63. AN TOUR PLOM

( follennoù 203 - 204 )

Kenta vellas an tan en tour plom  
Eur vugel divar brec'h e vam.

Hag e lavaras da Plouberis  
E man krog an tan en ho c'hillis.

Siwas er c'hreïs e man ive.  
Kris a viche ar galon na voelche  
En goerret plouber an eb a vize

E vellet tri person a tregont  
Ebars ar verret oc'h e neum respont.

Da gout na pini vize an ardissa  
Da pignat var an tour da genta.

Person Plouber a lavare  
Ebars an tour dre ma pigne :

Me non ket evid mond aman  
Gant ar plom bervet o diveran  
Dre ma koue leski e ra.

E man an erouant var beg an tour  
Hag en henon evel eur skour.

- Petra klaskez var dro va zi  
Me non ket bet en ta hini.

- Ta illis a zo interdisset  
Gant eur plac'h iaouank hag eur kloarek  
O pec'hi heni noz nedellek.

Kenta lazas an tan en tour plom  
Voa bara segal a lez bron.

Lez a peultrin eur wreg trivarc'h bla  
E vaga e bugel kenta.

- 168 -

Kris vije ar galon na voëlche  
En goeret Plomber neb a vije,

E voëlet ar sent ag ar sentezet  
Digasset tout da gorn ar verret.

O vellet a Verc'hes Vari  
Renket diloja deus e zi.

~~~~~

Jannet Kerguiduff, 16 janv. 1851

~~~~~